


**LEVRIOÙ EMBANNET  
e 2012 !**

**ABER**

115 Kergareg F-29870 Landeda

[pkermoal@wanadoo.fr](mailto:pkermoal@wanadoo.fr)

[www.aber-bzh.info](http://www.aber-bzh.info)




**ITRON VARIA GARMEZ**, gant **Youenn Drezen** romant (adembannadur)  
Digoradur gant Pierrette Kermoal - Kentskrid gant Roparz Hemon

Pont-'n-Abad, e-kreiz ar bloavezhioù 30. An holl labouradegoù a serr, n'eus ket labour ken evit an dud. Penaos dienañ ? Ha gallout a raio an arz reiñ adarre goanag ha fiziañs d'ar boblañs ? Paol Tirili a ouestl e amzer da gizellañ un delwenn eus Itron Varia Garmez. Ha dont a raio a-benn da reiñ korf d'e hunvre, arouez e feiz e madelezh ar vuhez hag e kened ar bed ?

Youenn Drezen (1899-1972) zo unan eus krouerion Gwalarn, hag eus al lennegezh vrezhon arnevez. Sellet e vez *Itron Varia Garmez* evel e bennoberenn.

360 p., 14x20, Meurzh 2012 ISBN 978-2-916845-16-6 Priz **17€**




**ILIZ HAG EMSAV**, **Gwenaél Maze** arnodskrid

"Ne glaskan prouiñ netra, klask a ran kompren", a skriv Gwenaél Maze. "Va devez zo lakaat a wel arvezioù 'zo eus obererezh ha leviadurezhioù an Iliz e Breizh, ha digejañ ar poell anezho." E-ser e gantreadennoù e tremened an Iliz e Breizh avat e liesa ar goulenn hag ez anad kudennoù dic'hortoz.

*Iliz hag Emsav* zo ur studienn binvidik, orinel ha sklaerius a-zivout ur parzh nebeut pleustret eus Istor Breizh.

136 p., 14x20, Here 2012 ISBN 978-2-916845-17-3 Priz **13€**




**DRE ODEOÙ AR FALTAZI...**, gant **Korriganed Gwened** Kontadennoù

Eus ur penn d'ar bed d'egile, war an douar ha dindanañ, e beg uhelañ an uhelañ gwez pe e strad ar mor, en tremened hag en dazont, ha c'hoazh e bed an hunvre, deuit da heul Korriganed Gwened dre odeoù o faltazi diharz !

Korriganed Gwened ? skolidi eus Skolaj Diwan ar Mor-Bihan o deus, e-ser ar Gerlenn-skrivañ, savet ar skridoù-mañ, tro-ha-tro fentus, spontus, fromus, leun a gevrin, hag ivez a varzhoniezh.

150 p., 14x20, Here 2012 ISBN 78-2-916845-19-7 Priz **13€**



**DR JEKYLL HA MR HYDE**, **Robert Louis Stevenson**  
romant - troidigezh gant Pierrette Kermoal

"Damantiñ a ran kalz, evit gwir, d'ar paourkaezh Hyde", a anzav ur wech an Dr Jekyll d'e vignon an noter Utterson. Penaos e c'hell Jekyll, brudet e kêr ha doujet evit e ouiziegezh hag e vadoberoù, kaout damant d'un hailhevod evel Hyde ? Ha perak ? Dre vignoniezh koulz ha dre guriusted, e vo kaset Utterson da ren ur gwir enklask polis evit diskuliañ ar c'hevrin a liamm an Dr Jekyll ha Mr Hyde.

Robert Louis Stevenson (1850 -1894) en deus savet oberennoù niverus-kenan. E-touez ar re anavezetañ emañ *The Strange Case of Dr Jekyll and Mr Hyde* (1886).

115 p., 14x20, Here 2012 ISBN 978-2-916845-18-0 Priz **12€**

**Ar goloioù zo treset gant Steven Maze**